

## 7 - MA C'HAMARAD KOZH PIERROT Mon vieux camarade Pierrot

Ma c'hozh c'hamarad kozh Pierrot  
En devoa prenet un oto  
Dont da vale deus bourk Tregrom betek kastell Melo

Erruet Pont Saladenn  
En devoa bet ur falladenn  
E-barzh kastell Kemelo oa aet 'r wetur war he genou

Pierre Denes gant ar volez  
En devoa digoret e boeniez  
Ha Pierre Unvoa deus e gostez en devoa torret e skoaz

Emile Skornet e-barzh al lost  
En devoa graet ur gwe d'e lost  
Ha paour kaezh Skornet a c'hoarzhe o welet ne oa ket  
gwall dapet

Kaset oa keloù d'Armañ  
Dont da gerc'hat an daou zen klañv  
Kaset 'an oto da di Goku, tout an dud lâre 'oa foutu

Klasket oa 'n aotrou Dazonville  
Dont da soanial da domisil  
Ha Pierre Unvoa 'oa aet da di Gonan d'en em soanial  
diouzh vije klañv  
Ha Pierre Denes 'oa aet d'ar gêr e viz bihan gantañ  
'barzh 'n e reor

*Mon sacré vieux copain Pierrot  
Avait acheté une auto  
Pour aller se promener de Tregrom au château de Kemelo*

*Arrivé au Pont Saladenn  
Il a eu un malaise  
Au château de Kemelo, la voiture s'est renversée*

*Pierre Denes, avec le volant  
S'était ouvert le poignet  
Et Pierre Unvoas, de son côté, s'était cassé l'épaule*


*Emile Skornet à l'arrière  
S'était tordu la queue  
Et le pauvre Skornet riait de voir que ce n'était pas grave*

*On fit prévenir Armand  
De venir chercher les deux malades  
On envoya la voiture chez Cocu, tout le monde disait  
qu'elle était foutue*

*On fit chercher monsieur Dazonville  
Pour venir soigner à domicile  
Et Pierre Unvoas était allé chez Conan pour se soigner  
de son mal  
Et Pierre Denes était rentré chez lui tout honteux (\*)*

*(\*) mot à mot : le petit doigt dans le cul.*

Cette chanson satirique a été collectée en 1989 par Guy Laudren auprès de Jeanne Falézan de Louargat. Elle fait allusion à des habitants de la région et date des années 30. Le garage Cocu existe toujours à Louargat, mais la chanson concerne le grand-père du propriétaire actuel.



Guy Laudren